



© Photoir

Skoazell & Desk 2013

Les aides de la
Région Bretagne pour
devenir enseignant bilingue
breton/français ou travailler
dans les métiers bilingues
de la petite enfance



Les dispositifs « Skoazell » et « Desk/enseignement » sont des aides individuelles aux personnes qui ont pour projet de devenir enseignant bilingue français-breton ou d'enseigner le breton. « Desk/petite enfance » est une aide individuelle aux personnes souhaitant exercer en breton un métier de la petite enfance. Ils sont mis en place dans le cadre des actions de la politique linguistique du Conseil régional en faveur de la transmission de la langue bretonne.

QUELS OBJECTIFS ?

Former un nombre conséquent de personnes qui soient en capacité d'enseigner la langue bretonne et en langue bretonne dans le système scolaire ainsi que de travailler en breton dans le monde de la petite enfance pour en permettre la transmission. Assurer un nombre adéquat de candidats aux postes d'enseignement afin de permettre la continuité du développement des trois filières d'enseignement bilingue.

POUR QUI ?

« Desk » et « Skoazell » s'adressent à tous ceux qui ont le projet professionnel de devenir enseignant bilingue français-breton ou enseignant de breton ou d'exercer en breton un métier de la petite enfance.

Vous voulez apprendre le breton ou perfectionner votre connaissance de la langue afin de devenir enseignant bilingue ou enseignant de breton : vous pouvez bénéficier de « Desk / enseignement ».

Ceci s'adresse aux enseignants monolingues ayant obtenu un congé-formation de leur employeur pour devenir enseignants bilingues/enseignants de breton ou aux titulaires d'une licence ou de tout autre diplôme ouvrant le droit à s'inscrire en master « enseignement bilingue » qui souhaitent auparavant apprendre la langue bretonne et qui sont inscrits ou préinscrits à une formation intensive en langue bretonne de 6 mois et/ou de 3 mois dans l'un des centres de formation suivants :

- > Kelenn – Quimper – en formation « Maîtriser le breton comme langue d'enseignement »
- > Mervent
- > Roudour
- > Skol an Emsav
- > Stumdi
- > UCO – Guingamp ou Arradon – OU « Métiers et Langue bretonne ».



« Desk / enseignement » concerne également les enseignants bilingues qui souhaitent suivre une formation supérieure de 3 mois en langue bretonne dans un des centres précités afin de perfectionner leur maîtrise de la langue.

Vous voulez apprendre le breton ou perfectionner votre connaissance de la langue afin de travailler dans les métiers bilingues de la petite enfance (auxiliaire de puériculture, agent-e spécialisé-e des écoles maternelles, assistant-e maternel-le, assistant-e parental-e, éducateur-riche de jeunes enfants, puériculteur-riche...) :

vous pouvez bénéficier de « Desk / petite enfance ». Ce dispositif s'adresse :

- aux personnels monolingues de la petite enfance déjà en fonction ayant obtenu un congé-formation de leur employeur pour devenir personnels bilingues de la petite enfance ;
- aux personnes déjà titulaires d'un diplôme ou concours ouvrant à un des métiers de la petite enfance et qui souhaitent apprendre la langue bretonne préalablement à leur recherche d'emploi ;
- aux personnes en reconversion professionnelle et relevant de la formation continue qui ont pour projet d'apprendre la langue bretonne préalablement à l'entrée dans une formation préparant à un métier de la petite enfance. Ces personnes devront être inscrites ou préinscrites à une des formations intensives en langue bretonne de 6 mois et/ou de 3 mois dans l'un des centres précités.

Vous êtes déjà brittophone et vous vous inscrivez en master enseignement bilingue : vous pouvez bénéficier de « Skoazell ».

Cela s'adresse à tous ceux qui :

- ont une licence ou toute autre équivalence permettant de s'inscrire en master « enseignement bilingue » ;
- ont un bon niveau en langue bretonne ;
- sont inscrits ou préinscrits en master 1 ou en master 2 :

→ pour devenir enseignant du 2nd degré :

> Rennes 2 – département de Breton – en master bivalent « Métiers de l'éducation et de la formation, spécialité Breton et métiers de l'enseignement » ;

> UBO – UFR Lettres et Sciences Humaines – en master « Métiers de l'enseignement, professorat des lycées et collèges, parcours breton celtique »

→ pour devenir enseignant du 1^{er} degré :

> IUFM-UBO – site de Saint-Brieuc – en master « Professorat des écoles bilingues et métiers de l'enseignement » (filière publique) ;

> Kelenn – Quimper – en master « Éducation et formation, enseignement bilingue immersif breton-français » (filière Diwan) ;

> ISFEC Bretagne – site de Brest – en master bilingue « Métiers de l'enseignement et de l'éducation » (filière privée catholique).

Conditions de recevabilité

Il est possible de bénéficier de « Desk / enseignement » pendant l'année de formation au breton puis de « Skoazell » pendant les deux années de master enseignement bilingue.

L'aide au titre de « Skoazell » ne peut être cumulée avec un autre financement de la Région.

L'aide au titre de « Desk » ne peut être cumulée avec un autre financement de la Région, à l'exception de l'aide au titre de la rémunération des stagiaires et/ou de la prise en charge de la place de stage pour les demandeurs d'emploi.

Veillez à ce que votre dossier « Skoazell » ou « Desk » soit complet afin qu'il puisse être traité rapidement.

QUELLES MODALITÉS ?

DESK

Financement

« Desk / enseignement » est un dispositif partenarial entre la Région Bretagne et les Départements du Finistère et du Morbihan. La pré-instruction des dossiers est confiée à l'Office public de la langue bretonne.

Le montant de l'aide est de 3 000 euros pour les formations longues (6 mois). L'aide de la Région représente le différentiel

entre le montant maximal (3 000 €) et l'aide apportée par le Département de résidence du bénéficiaire. Si le Département concerné n'apporte pas d'aide, la participation de la Région est plafonnée à 2 500 euros.

L'aide est de 1 500 euros pour la formation supérieure (3 mois). Les deux aides sont cumulables en cas de stage de 6 + 3 mois.

L'engagement du bénéficiaire

En contrepartie de l'aide, vous vous engagez :

▪ à tout mettre en œuvre pour devenir enseignant de breton ou enseignant bilingue dans une des trois filières d'enseignement bilingue ou immersif si vous êtes bénéficiaire de « Desk / enseignement » ;

▪ à tout mettre en œuvre pour exercer un métier de la petite enfance en langue bretonne si vous êtes bénéficiaire de « Desk / petite enfance » ;

▪ à passer l'examen du DCL (Diplôme de Compétence en Langue) à l'issue de votre formation.

SKOAZELL

Financement

Le montant de l'aide « Skoazell » est de 5 000 euros pour chacune des deux années de master. En cas de redoublement de la première année de master, le bénéficiaire ne pourra obtenir la deuxième partie de Skoazell que lors de son année de master 2. Il ne peut en aucun cas être accordé plus de deux fois 5 000 euros au titre de « Skoazell ».

L'engagement du bénéficiaire

En contrepartie de « Skoazell », vous vous engagez :

▪ à suivre la totalité de la formation master ;

▪ à respecter l'obligation, attestée par les établissements, de présence aux formations (« Skoazell » ne peut être accordé aux étudiants dispensés d'assiduité) ;

▪ à vous inscrire et vous présenter au concours de Professeur des Écoles (PE) bilingue ou de Professeur des Lycées et Collèges (PLC) bilingue, et, en cas d'échec, à vous représenter une seconde fois ;

▪ à enseigner pendant 5 ans dans une classe bilingue français-breton.

MODALITÉ DE CONTRÔLE

En cas de rupture de son engagement, le bénéficiaire de « Skoazell » ou de « Desk » devra rembourser l'aide allouée. Ces dispositions sont détaillées dans la convention d'engagement du bénéficiaire.

DESK

Constitution du dossier

Votre dossier de candidature comprendra :

- la fiche de renseignement ;
- la lettre d'intention dûment signée ;
- votre CV ;
- la copie de votre certificat d'inscription dans l'un des établissements de formation ;
- l'attestation de paiement des frais d'inscriptions et pédagogiques ;
- deux RIB.

Pour « Desk / enseignement » :

- une lettre de motivation au métier d'enseignant bilingue ;
- une copie de votre diplôme de Licence ou autre diplôme Bac +3 ou une attestation de l'Université certifiant du suivi d'une Licence 3^e année ou votre diplôme le plus élevé (si supérieur à la Licence).

Pour « Desk / petite enfance » :

- une lettre de motivation au métier bilingue de la petite enfance auquel vous vous destinez ;
- une copie de votre attestation d'obtention d'un concours permettant de travailler dans le secteur de la petite enfance (ATSEM...) ou votre diplôme permettant de travailler dans le secteur de la petite enfance (CAP petite enfance, BEP carrières sanitaires et sociales, DPAP, DEEJE, agrément PMI...) ou votre diplôme ouvrant le droit à intégrer une formation préparant à un métier de la petite enfance ou un descriptif des conditions qui vous permettent l'accès à l'un des métiers de ce secteur ou vous ouvrent le droit à entrer dans une formation préparant à un métier de la petite enfance.

Procédure de sélection des candidats

Les candidats seront sélectionnés sur dossier. L'Office public de la langue bretonne procédera à la pré-instruction des dossiers.

Dépôt du dossier

Les dossiers « Desk » sont à adresser via votre centre de formation à :

Madame la Présidente de l'Office public de la langue bretonne
8 bis rue Félix Faure 29 270 CARHAIX-PLOUGUER

RETRAIT D'UN DOSSIER

Téléchargez la lettre d'engagement « Skoazell » sur le site Internet de la Région Bretagne www.bretagne.fr/skoazell.

La lettre d'intention, la fiche de renseignements « Desk » et la liste des éventuelles pièces supplémentaires sont disponibles en téléchargement sur le site Internet de la Région Bretagne www.bretagne.fr/desk.enseignement ou www.bretagne.fr/desk.petite.enfance ou sur le site de l'Office public de la langue bretonne www.ofis-bzh.org.

SKOAZELL

Constitution du dossier

Le dossier de candidature comprendra :

- la lettre d'engagement bilingue dûment signée ;
- une lettre de motivation bilingue présentant votre projet professionnel et précisant le type d'enseignement bilingue vers lequel vous vous destinez ;
- un CV bilingue ;
- une copie du diplôme de Licence ou autre diplôme bac +3 ou d'une attestation de l'Université certifiant du suivi d'une Licence 3^e année ;
- une attestation de l'inscription en master ;
- un RIB.

Procédure de sélection des candidats

Les candidats seront sélectionnés par un jury composé de représentants de la Région Bretagne, de l'Académie, de l'Office public de la langue bretonne et des centres de formation. Les candidats seront auditionnés en breton, l'entretien évaluera notamment les motivations et leurs aptitudes linguistiques. Le jury pourra conditionner sa sélection au suivi par le candidat d'un stage immersif en breton. Il est très fortement conseillé de s'inscrire à l'avance à un tel stage, quelle que soit la session d'auditions choisie (prendre contact avec la Région pour plus d'information). Chaque candidat recevra de la Région une convocation.

Deux sessions d'auditions auront lieu, début juillet et début septembre 2013 au Conseil régional de Bretagne. La première liste définitive des bénéficiaires sera connue mi-juillet et avant le début de la formation pour la seconde. Les candidats retenus recevront alors une convention d'engagement à signer.

Dépôt du dossier

Les dossiers « Skoazell » sont à adresser à :

Monsieur le Président du Conseil régional
283 avenue du Général Patton - CS 21101
35 711 RENNES cedex 7

Les dates limites de dépôt du dossier sont le lundi 24 juin 2013 pour la 1^{re} session et le lundi 26 août 2013 pour la 2^{nde} session.

POUR PLUS D'INFORMATIONS :

Service des Langues de Bretagne - Direction de la Formation initiale, de l'enseignement supérieur, de la recherche et des sports
Courriels : bourse-skoazell@region-bretagne.fr (pour les deux dispositifs) - desk@ofis-bzh.org (pour « Desk »).



© Phovoir

Skoazell & Desk 2013

Skoazelloù Rannvro
Breizh evit dont da vezañ
kelenner divyezhek
brezhoneg/galleg
pe ober micherioù
divyezhek war-dro
ar vugaligoù



Rannvro
BREIZH



• formation • éducation • culture •

« Skoazell » ha « Desk / kelenn » zo skoazelloù hiniennel evit ar re zo e soñj da vont da gelennerien zivyezhek galleg-brezhoneg pe da gelennerien war ar brezhoneg. « Desk / bugaligoù » zo ur skoazell hiniennel evit ar re a fell dezho ober ur vicher war-dro ar vugaligoù e brezhoneg. Lakaet e vezont e pleustr e framm politikerezh yezh ar C’huzul-rannvro da gas ar brezhoneg war-raok.

PESEURT PALIOÙ ?

Stummañ un niver bras a dud varrek da gelenn brezhoneg hag e brezhoneg er skolioù pe da labourat e brezhoneg e bed ar vugaligoù, evit ma vo treuzkaset ar yezh a rumm da rumm. Pourveziñ trawalc’h a zanvez kelennerien da vont war ar postoù kelenn zo ezhomm anezho e tri hentad an deskadurezh divyezhek.

EVIT PIV ?

Kement hini zo gant ar soñj da vont war ar vicher kelenner divyezhek galleg-brezhoneg pe kelenner war ar brezhoneg, pe ober ur vicher war-dro ar vugaligoù e brezhoneg, a c’hall ober e vad eus « Desk » ha « Skoazell ».

Fellout a ra deoc’h deskiñ brezhoneg pe gwellaat ho parregezh war ar yezh evit dont da vezañ kelenner divyezhek pe kelenner war ar brezhoneg : ho mad a c’hellit ober eus « Desk / kelenn ».

« Desk / kelenn » a vo grataet d’ar gelennerien unyezhek o deus bet un ehan-stummañ digant o implijer evit mont da gelenner divyezhek / da gelenner war ar brezhoneg PE d’ar re o deus tapet un aotreegezh pe un diplom kevatal all a ro ar gwir da lakaat e anv er master « deskadurezh divyezhek », hag a fell dezho deskiñ brezhoneg a-raok kelenn hag a zo enskrivet pe ragenskrivet evit ur stummadur brezhoneg d’an daoulamm a bad 6 miz ha/pe 3 miz en unan eus ar c’hreizennoù stummañ-mañ :

- > Kelenn – Kemper – er stummadur « mestroniañ ar brezhoneg da yezh kelenn » ;
- > Mervent ;
- > Roudour ;
- > Skol an Emsav ;
- > Stumdi ;
- > Skol-veur gatolik ar C’hornôg – Gwengamp pe Aradon – DS « Micherioù ha brezhoneg ».



« Desk / kelenn » zo ivez evit ar gelennerien zivyezhek a fell dezho heuliañ ur stummadur uhel e brezhoneg e-pad ouzhpenn 3 miz en unan eus ar c’hreizennoù meneget a-raok evit kreskiñ o barregezh war ar brezhoneg.

Fellout a ra deoc’h deskiñ brezhoneg pe gwellaat ho parregezh war ar yezh evit ober micherioù divyezhek war-dro ar vugaligoù (eiler bugaligoù, gwazour arbennik er skolioù-mamm, skoazeller-mamm, skoazeller-kerent, kasour bugaligoù, desaver...) : ho mad a c’hellit ober eus « Desk / bugaligoù ».

Soñjet eo bet ar skoazell-mañ evit :

- an implijidi unyezhek a labour dija e bed ar vugaligoù hag o deus bet un ehan-stummañ digant o implijer evit ober war-dro ar vugaligoù en div yezh ;
- an dud tapet ganto un diplom pe ur genstrivadeg a ro ar gwir dezho d’ober micherioù war-dro ar vugaligoù hag a fell dezho deskiñ brezhoneg a-raok klask labour ;
- an dud zo o klask ul labour all e framm ar stummañ dibaouez hag a zo e soñj deskiñ brezhoneg a-raok kregiñ gant ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù. Ret e vo d’an dud-se bezañ enskrivet pe ragenskrivet evit ur stummadur brezhoneg d’an daoulamm a bad 6 miz ha/pe 3 miz en unan eus ar c’hreizennoù meneget a-raok.

Brezhoneger oc'h dija ha lakaet hoc'h eus hoc'h anv er master deskadurezh divyezhek : ho mad a c'heller ober eus « Skoazell ».

« Skoazell » a vo grataet d'an holl re :

- o deus tapet un aotregezh pe ul live kevatal all a ro an tu da lakaat e anv er master « deskadurezh divyezhek » ;
- o deus ul live brezhoneg mat ;
- zo enskrivet pe ragenskrivet e master 1 pe e master 2 :
→ evit dont da vezañ kelenner en 2^d derez :
> Roazhon 2 – kevrenn ar brezhoneg – master daoubennek « Micherioù kelenn ha stummañ, arbennigiezh brezhoneg ha micherioù ar c'helenn » ;
> SBI – USE Lizhiri ha Skiantoù an den – master « Micherioù kelenn el liseoù hag er skoloù, hentad brezhoneg keltieg »
→ evit dont da vezañ kelenner er 1^{añ} derez :
> ESSM-SBI – e Sant-Brieg – master « Kelenn er skolioù divyezhek ha micherioù kelenn » (hentad publik) ;
> Kelenn – Kemper – master « Kelenn ha stummañ, deskadurezh divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg » (hentad Diwan) ;
> EUSGeK Breizh – e Brest – master divyezhek « Micherioù kelenn ha deskiñ » (hentad prevez katolik).

Divizoù degemer

Gallout a rit kontañ war « Desk / kelenn » e-pad ho ploavezh stummañ e brezhoneg ha war « Skoazell » e-pad an daou vloavezh e master deskadurezh divyezhek.

Ne c'hall ket « Skoazell » bezañ roet ma vez ur skoaziad all digant ar Rannvro.

Ne c'hall ket « Desk » bezañ roet ma vez ur skoaziad all digant ar Rannvro, nemet unan evit goprañ ar stajidi ha/pe unan evit paeañ plas ar staj evit ar re zilabour e vefe.

Talot evezh, mar plij, ma vo klok ho teuliad « Skoazell » pe « Desk » evit ma vo graet buan war e dro.

PESEURT MODELEZHIOÙ ?

DESK

Arc'hantaouiñ

« Desk / kelenn » zo ur stignad savet gant Rannvro Breizh ha Departamantoù Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan. Gant Ofis publik ar brezhoneg e vez rakstudiet an teuliadoù.

Da 3 000 euro e sav sammad ar skoazell evit ar stummadurioù hir (6 miz). Gant ar Rannvro e vez roet an diforc'h zo etre ar sammad uhelañ (3 000 €) ha skoazell an Departamant m'emañ an degemerer o chom. Ma n'eus skoaziad ebet gant an Departamant n'ay ket skoaziad ar Rannvro en tu-hont da 2 500 euro. Da 1 500 euro e sav ar skoazell evit ar stummadur uhel (3 miz).



© Martin Boudier

An div skoazell a c'heller kaout war un dro ma vez graet ur staj 6 + 3 miz.

Engouestl an degemerer

En eskemmm ouzh ar skoazell e rankit gouestlañ :

- reiñ bec'h evit dont da vezañ kelenner brezhoneg pe kelenner divyezhek en unan eus an tri hentad kelenn divyezhek pe dre soubidigezh, ma tegemerit « Desk / kelenn » ;
- reiñ bec'h evit mont war ur vicher e brezhoneg war-dro ar vugaligoù, ma tegemerit « Desk / bugaligoù » ;
- tremen arnodenn an DBY (Diplom Barregezh war ar Yezh) e dibenn ho stummadur.

SKOAZELL

Arc'hantaouiñ

Da 5 000 € e sav « Skoazell » evit pep hini eus an daou vloavezh master. Ma ne dremen ket an degemerer en eil bloavezh master goude ar bloaz kentañ ne c'heller resev eil lodenn ar Skoazell nemet e master 2. N'hell ket sammad ar « Skoazell » sevel da ouzhpenn div wezh 5 000 euro forzh penaos.

Engouestl an degemerer

En eskemmm ouzh « Skoazell », e rankit gouestlañ :

- heuliañ stummadur ar master betek penn ;
- doujañ d'ar reolenn vezañs er stummadurioù gant testeni an ensavadurioù stummañ (ne c'haller ket reiñ « Skoazell » d'ar studieren na zeunt ket d'ar c'hentelioù) ;
- lakaat hoc'h anv ha kemer perzh er genstrivadeg Kelennerien er Skolioù (KS) divyezhek pe ar genstrivadeg Kelennerien el Liseoù hag er Skoloù (KLS) divyezhek, ha tremen un eil gwezh m'hoc'h eus c'hwit ar wezh kentañ ;
- kelenn e-pad 5 bloaz en ur c'hlas divyezhek galleg-brezhoneg.

MODELEZH KONTROLLAÑ

Ma vez torret an emglev e ranko degemerer « Skoazell » pe « Desk » daskoriñ ar skoazell roet dezhañ. Skrivet eo an difradurioù en emglev engouestlañ an degemerer.

DESK**Sevel an teuliad**

Ho teuliad enskrivañ a c'hoarvezo eus :

- ar fichenn ditouriñ ;
- al lizher mennadiñ sinet ;
- ho CV ;
- un eilad eus ho testeni enskrivañ en unan eus an ensavadurioù stummañ ;
- un testeni eus paeamant ar mizoù enskrivañ ha pedagogel ;
- daou DAB.

Evit « Desk / kelenn » :

- ul lizher emginnig da vont war ar vicher kelenner divyezhek ;
- un eilad eus ho tiplom Aotreegezh pe un diplom all Bachelouriezh +3 pe un testeni eus ar Skol-veur a brou emaoch oc'h heuliañ un Aotreegezh 3e bloavezh, pe ho tiplom uhelañ (mard eo uheloc'h eget an Aotreegezh).

Evit « Desk / bugaligoù » :

- ul lizher emginnig evit ober ar vicher divyezhek war-dro ar vugaligoù emaoch e-sell d'ober ;
- un eilad eus ho testeni (Gwazour tiriadel arbennik ar skolioù-mamm...) pe eus ho tiplom evit gallout labourat e gennad ar vugaligoù (Testeni gouestet vicherel bugaligoù, Breou studi vicherel micherioù yec'hedel ha sokial, Diplom micherel eiler babigouriezh, Diplom Stad desaver bugaligoù, gratadur gant Gwarez ar Mammoù hag ar Vugale...) pe eus ho tiplom a ro gwir da heuliañ ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù pe un deskivadenn eus an divizoù a ro an tu deoc'h da vont war unan eus micherioù ar gennad pe ar gwir da greññ gant ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù.

Doare dibab an emstriverien

Diouzh o zeuliad e vo dibabet an emstriverien. Ofis publik ar brezhoneg a rakstudio an teuliadoù.

Fiziot an teuliad

An teuliadoù « Desk » zo da gas dre hanterouriezh ho kreizenn stummañ, da :

Itron Prezidantez Ofis publik ar brezhoneg

8 bis straed Félix Faure 29 270 KARAÉZ-PLougÉR

SKOAZELL**Sevel an teuliad**

An teuliad enskrivañ a c'hoarvezo eus :

- al lizher engouestlañ sinet en div yezh ;
- ul lizher emginnig en div yezh ma teskrivit ho raktes micherel ha ma resaisit war peseurt doare kelenn divyezhek hoc'h eus c'hoant da vont ;
- ur CV en div yezh ;
- un eilad eus diplom hoc'h aotreegezh pe n'eus forzh peseurt diplom all bachelouriezh+3 pe un testeni eus ar Skol-veur a brou emaoch oc'h heuliañ un Aotreegezh 3e bloavezh ;
- un testeni a brou hoc'h eus lakaet hoc'h anv e master ;
- un DAB.

Doare dibab an emstriverien

Gant ur bodad-barn ennañ dileuridi eus Rannvro Breizh, eus an Akademiezh, eus Ofis publik ar brezhoneg hag eus ar c'hreizennoù stummañ e vo dibabet an emstriverien. Selaouet e vint e brezhoneg. O youl hag o barreezh war ar yezh a vo priziet dreist-holl. Gallout a ray ar bodad dibab an emstriverien gant ma vo heuliet ur staj brezhoneg dre soubidigezh ganto. Aliet oc'h da lakaat hoc'h anv en a-raok e seurt stajoù, ne vern deiziad an dalc'h dre gomz gant ar bodad-barn (mont e darempred gant ar Rannvro evit gouzout hiroc'h). Ul lizher-galv a resevo pep emstriver digant ar Rannvro.

Daou zalc'h dre gomz a vo, e deroù miz Gouere hag e deroù Gwengolo 2013 e Kuzul-rannvro Breizh. E-kreiz miz Gouere e vo anavezet listenn glok kentañ an degemererien hag a-raok deroù ar stummadur evit an eil dalc'h. An degemererien dalc'h het a resevo un emglev engouestlañ da sinañ neuze.

Kas an teuliad

An teuliadoù « Skoazell » zo da gas da :

Aotrou Prezidant ar C'huzul-rannvro

283 bali ar Jeneral Patton – CS 21101

35 711 ROAZHON cedex 7

An termen diwezhañ evit kas an teuliadoù a vo al Lun 24 a viz Mezheven 2013 evit an dalc'h 1^{añ} hag al Lun 26 a viz Eost 2013 evit an 2^{añ}.

KEMER UN TEULIAD

Pellgargit al lizher engouestlañ « Skoazell » e lec'hienn Genrouedad Rannvro Breizh www.bretagne.fr/skoazell.

Al lizher mennadiñ, ar fichenn ditouriñ ha roll ar pezhioù ouzhpenn evit « Desk », diouzh ma vez, a c'heller pellgargañ e lec'hienn Genrouedad Rannvro Breizh www.bretagne.fr/desk.enseignement pe www.bretagne.fr/desk.petite.enfance pe e lec'hienn Ofis publik ar brezhoneg www.ofis-bzh.org.

EVIT GOUZOUT HIROC'H :

Servij Yezhoù Breizh – Renerezh ar Stummerezh kentañ, an deskadurezh uhel, an enklask hag ar sport

Postelou : bourse-skoazell@region-bretagne.fr (evit an daou stignad) - desk@ofis-bzh.org (evit « Desk »).